


Kantik Sant Per ha Santez Nominanda



DISKAN

Kanomp, kanomp a greiz kalon

Meuleudi Sant Per hor Patron;

Meulomp ive, gant feiz, gant joa,

Hor Patronez : Nominanda!

} bis

- 1 -

Etre Sant-Hernin ha Plevin,
Plonger, Treogan ha Gourin,
E ma Motreff war ar mene:
Tost eus an nenv, tost da Zoue!

2

Gant hon tud-koz oa dibabet
Evit Patron Sant Per karet;
Laromp d'ezan ni hiro c'hoaz
Renit warnomp, bemdez, bep bloaz!

- 3 -

'Tal Pont-Gueguen e kreiz ar vro
Kaout o iliz felle d'ezo
Met ' pad an noz al labour grêt
Vije dalc'hamad d'ar vourc'h kaset.

- 4 -

Evit pesketa hon ine
Eo deut Sant Per, ^{war} hor mine;
Larout ra domp sevel bepred
Pell d'euz ar pri hag ar pec'het.

- 5 -

'Vel hon tadou, bout Kristenien,
Dalc'ha d'ar zul ha d'ar beden,
Larbourat mat en hor micher :
Setu kentel Aotrou Sant Per.

- 6 -

N'eo ket brudet Nominanda
Eur plac'hig vihan eus Roma,
Er gwad, hep ano, badezet
Ha gant Hor Salver kurunet !

7

Gwerc'hez ha merzerez santel
Ni zen da c'houlennu ho skoazel;
Ezom hon eus, e peb mare
Eus ho sikour dirag Doue.

8

Santez karet dre ho pedenn
Sikourit ar mammoù kristen
Dre skoueriou santel ho puhe
Da zewel mat o bugale.

9

D'ar merc'hed yaouank, gwerc'hez pur
Roit d'ezo bout humbl ha fur
Ma vint fidel d'o deveriou
Ha direbech en hor maeziou!

10

Sant Per, Sant Alar, Sant Lery,
Barba, Berc'hed, Gwerc'hez Vari,
Sent ha Santezed hor parrez
Hon diwallit gant karantez!